

Modèle CCYC : ©DNE																				
Nom de famille (<i>naissance</i>) :																				
(Suivi s'il y a lieu, du nom d'usage)																				
Prénom(s) :																				
N° candidat :											N° d'inscription :									
(Les numéros figurent sur la convocation.)																				
Né(e) le :			/				/													
																				
1.1																				

Évaluation

CLASSE : Première

VOIE : Générale Technologique Toutes voies (LV)

ENSEIGNEMENT : breton

DURÉE DE L'ÉPREUVE : 1h30

Niveaux visés (LV) : LVA **B1-B2** LVB **A2-B1**

Axes de programme : **Axe 3 « Art et pouvoir »**

CALCULATRICE AUTORISÉE : Oui Non

DICTIONNAIRE AUTORISÉ : Oui Non

Ce sujet contient des parties à rendre par le candidat avec sa copie. De ce fait, il ne peut être dupliqué et doit être imprimé pour chaque candidat afin d'assurer ensuite sa bonne numérisation.

Ce sujet intègre des éléments en couleur. S'il est choisi par l'équipe pédagogique, il est nécessaire que chaque élève dispose d'une impression en couleur.

Ce sujet contient des pièces jointes de type audio ou vidéo qu'il faudra télécharger et jouer le jour de l'épreuve.

Nombre total de pages : 4

Baccalauréat général et technologique

Langues vivantes régionales - Breton

Classe de première

Compréhension de l'écrit et expression écrite

(3^e trimestre)

Niveau visé LVB : A2-B1	Durée de l'épreuve 1 h 30	Barème 20 points CE : 10 points EE : 10 points
----------------------------	------------------------------	--

L'ensemble du sujet porte sur l'**axe 3** du programme : « **Art et pouvoir** »

Il s'organise en deux parties :

- 1- Compréhension de l'écrit**
- 2- Expression écrite**

Vous disposez d'**une heure trente** pour prendre connaissance de l'intégralité du dossier et pour traiter la compréhension de l'écrit (partie 1) et le sujet d'expression écrite (partie 2) **en breton**.

Alan Stivell en Olympia, 1972 : lanv ar sonerezh keltiek

Al lun 28 a viz C'hwevrer 1972 e kinnigas Alan Stivell, en Olympia, ur sonadeg deuet da vezañ kazi mojennel pa roas honnezh lañs d'al lanv breizhek ha keltiek a zirollas diwar neuze er Frañs hag e lec'h all.

Sonerezh Breizh o tarzhañ war leurenn an Olympia

Da geñver ur *Musicorama* bet aozet gant Lucien Morisse, rener programmoù *Europe 1*, e voe kinniget ar sonadeg-se. Talvoudegezh an darvoud a gomprener gwelloc'h pa seller un tamm ouzh roll ar re a oa bet pedet c'hoazh en abadenn-se : Leonard Cohen, Simon & Garfunkel, Jimi Hendrix, Janis Joplin ha Joan Baez en o zouez...

Pres hag entan a oa en Olympia an deiz-se, bannieloù gwenn-ha-du savet uhel war ur mor a dud ; arvesterien tomm d'ar folk koulz ha Bretoned Paris ha tro-war-dro a oa e-leizh er sal ; ha war al leurenn, startijenn ganto, Alan Stivell hag e vuzisianed.

Santet mat e vez c'hoazh, pa selouer al *live* bet enrollet an noz-se, ar blijadur a oa bet gant an arvesterien a stlak o daouarn kazi dibaouez ken a findaone. Trizek son zo war ar bladenn, tonioù hengounel bet kempennet gant Stivell an holl anezhe. En o zouez ez eus *Pop Plinn* (rock meurbet !), *Suite sudarmoricaine* (un ton deuet da vezañ hollvrudet, o voulc'hañ an hent da *Pardon Speied*), hag eveljust, *Tri Martolod*, deuet hec'h enrolladenn en Olympia an deiz-se da vezañ un ton dreistbrudet. Bez ez eus un dañs-tro

ivez, bet kempennet gant Alan Stivell, diber he digoradur gant un delenn geltiek, ha kanet gantañ dirak arvesterien mil entanet hag a grogas enni raktal.

Lanv Stivell

Goude ma ne oa ket savet sal an Olympia evit an dañs e stagas tost an holl arvesterien ganti betek er-maez. Displegañ a ra Alan Stivell e soñj diwar an darvoud-se e *Racines interdites* : « *Dre ar c'hanaouennoù hengounel bet klevet gant ar Vretoned en o yaouankiz, a oa bet lâret dezho ne oa diouto nemet kozh traoù diot ha diamzeriet, emañ Pobl Vreizh war leurenn an Olympia, en ul lec'h brudet ha diouzh ar c'his. Ur stroñs an hini eo : a greiz-holl e taol pled ar Vretoned yaouank dedennet gant sonerezh Amerika ha Breizh-Veur e talv sonerezh Breizh kement all, hag e c'heller kanañ e brezhoneg kerkoulz all* ». Pelloc'h ez anzavo Stivell n'en doa ijinet gwech ebet e c'hellje ar sonadeg-se skeiñ ar Vretoned kement-se, ha, nebeutoc'h c'hoazh, ar Frañsizien dre vrás d'o heul.

War e chal e oa sonerezh Breizh diwar neuze. E Miz Mae e voe embannet ar bladenn *live a reas berzh*, un bamm. War-dro 15 000 skouerenn anezhi a voe gwerzhet e korf ur bloavezh. Ha kalz muioc'h c'hoazh abaoe : ouzhpenn 2 vilion ! Klevet e voe war ar gwagennouù adalek an hañv, ken brav ken e voe brudet Alan Stivell gant an holl e Frañs abbenn an diskar-amzer. Troiadoù a voe savet un tamm e pep lec'h e Bro C'hall hag er bed iver, hag embannet e voe meur a bladenn all gant ar c'haner ha soner breizhat, war un dro feal d'an hengoun ha troet d'an nevezadur, telennoù nevez gantañ ha doareoù seniñ nevez dezhañ.

Gant ar « prantad Stivell »-se, ken dreistordinal, e voe boulc'het an hent da veur a arzour ha brudet sonerezh Breizh evel ne oa bet biskoazh hag, asambles gantañ, sevenadur Breizh hag ar bed keltiek.

Diwar Laurent Bourdelas (brezhoneg gant Jean-Do Robin), Du 2016
Lec'hienn *Bécédia Sevenadurioù*, www.bcd.bzh

1. Compréhension de l'écrit (10 points)

Respondit e brezhoneg d'ar goulennoù amañ war-lerc'h :

- Digustum e oa bet sonadeg Alan Stivell. Perak ?
- « N'en doa ijinet [Alan Stivell] gwech ebet e c'hellje ar sonadeg-se skeiñ ar Vretoned kement-se ». Displegit ar frazenn-mañ.
- Diskouezhit penaos ez eas sonerezh Breizh, goude ar sonadeg, eus sevenadur ar vro da sevenadur evit ar bed.

2. Expression écrite (10 points)

Respointit e brezhoneg da unan eus an daou c'houlenn amañ war-lerc'h.

Savit ur pennad-skrid a 120 ger d'an nebeutañ.

Goulenn A

Kazetenner(-ez) oc'h, bet o sevel goulennou ouzh arvesterien sonadeg Alan Stivell. Savit ar pennad kazetenn.

Goulenn B

« A greiz-holl e taol pled ar Vretoned yaouank dedennet gant sonerezh Amerika ha Breizh-Veur e talv sonerezh Breizh kement all, hag e c'heller kanañ e brezhoneg kerkoulz all » eme Alan Stivell. A-du oc'h gantañ ? Displegit.